

YF_0109_Ha pa oan bihan bihan, ti ma mamm ti ma zad

(Kost ar c'hoad)

Ha pa oan bihan bihan, e ti ma mamm, e ti ma zad
Me a oa ur c'hrouadurig a oa disavet mad

Hag abred e oan kaset pellig mad deuz ar ger
Evid bezan studiet, e-barz ar seminer

Me na oan ket nemed eiz vloaz dre-oll pa oan kaset
Seminer Plougernevel evid bezan studiet

Pa oan bet seiz vloaz enan peotramant tro-war-dro
Zo erru ganin kelou ma mamm a oa maro

Me en em lakaas da ouelan, na ouelen ket em sujet
'Klevet laret e oa maro ar vamm he-doa ma ganet

A-benn ur pennad goude am-eus bet gwas kalonad
Arru zo ganin kelou e oa maro ma zad

Na 'vid kleved kement-se, me oa diskonsolet
Klevet laret e oa maro an tad en-doa ma maget

Ha me mond d'ober ma 'fak evid mond e-barz ar ger
Ha da lared kenavo d'an oll er seminer

Pa oan arru war an hent ur pennad avanset
Hag ur mesaour yaouank me am-eus rankontret

Arrested skoler yaouank or mamantig amzer
Hag e lakin da ma dorn en ho hini ul lizer

Hag e lakin ga ma dorn en ho hini ul lizer
Hag a zo digaset deoh digand ho mestrez ker

Hag a zo digaset deoh digand ho mestrez ker
Lared deoh mond en Argoll evid bezan skrivagner

Lared deoh mond en Argoll petra buro he zad
Ha mar be komportamant, c'hwi a raio fortun vad

Ni a chomas un tammig 'zo, oarem petra d'ober
O pe moned en Argoll, o pe moned d'ar ger

Ha ma c'hoar pa glevas-hi e ven erru e-barz ar vro
Tec'het da ma vrehetan, en em lako da ouelo

Tavit, tavit ma c'hoar baour tavit na ouelit ket
Yaouankoh evidom hon daou minor a zo chomet

Yaouankoh evidom hon daou minor a zo chomet
O na c'hwi e leh ho sonj dimezin a riet.